

FRATERNITE ORTHODOXE SAINTE-ANNE  
BREURIEZH REIZHVRIEK SANTEZ ANNA

# FEUILLET SAINTE ANNE



N° 19

Juin 2016

## Nouvelles de l'Orthodoxie en Bretagne

- Le père Adrian IUGA, de Nantes, a acquis avec sa paroisse une église à VERTOU, 85 route de nantes (FSA n° 17), celle-ci sera inaugurée

**le samedi 2 juillet 2016**

Programme :

vendredi 1<sup>er</sup> juillet à 20h00 : Spectacle de musique classique

samedi 02 juillet à 08h00 : célébration des matines, des heures puis Liturgie présidée par l'évêque MARC. Agapes.

- Nous sollicitons toujours des dons pour poursuivre et achever la chapelle au Luidic à Locmaria près de Quistinic en Morbihan.  
(FSA n° 11, 12, 13, 14,15 et 17).

- Stad zo en Embannadurioù An Treizher o kinnig deoc'h : GERIADUR AN DOUEONIEZH gant Turiaw ar Menteg

Les Editions An Treizher sont heureuses de vous proposer le DICTIONNAIRE de THEOLOGIE (en breton) de Turiaw ar Menteg :

da RAKPRENAÑ

en SOUSCRIPTION

13 €

kuit a vizoù-kas ouzhpenn

*sans frais d'envoi supplémentaires*

**betek an 30 gwengolo 2016**

**jusqu'au 30 septembre 2016**

15,5 x 22 cm, 452 p., priz foran 15 €

**Geriadur pleustrek an Doueoniezh, Feizoniezh, Biblouriezh, Lidouriezh, Ilizouriezh :** pennoberenn Turiaw ar Menteg. Gerioù pennañ an doueoniezh zo lakaet ha despizet amañ e brezhoneg evit ar wech kentañ. Diougonour ampart anezhañ en o laka an aozer amañ en o c'hemperzh, oc'h ober eus an kez geriadur ur wir oberenn speredel vev. Ar geriadur unyezhek, 343 fajenn ha 1433 fennger ennañ, 'zo d'e heul daou alc'houez brezhoneg-galleg ha galleg-brezhoneg 88 pajenn ha menegvaou liesyezhek (gresianek, hebraek, slavonek, latin...).

E sifera embann abretañ gwellañ ar Geriadur e kinnig deoc'h An Treizher doareoù lies da brenañ en ur ser meur a oberenn gant Turiaw ar Menteg, ar Geriadur e-barzh : gwelout ar pezh stag. Embann ar Geriadur e 2016 eo an amboaz.

Bennoz-h-Doue deoc'h evit ho skoazell.

Yann Varc'h Thorel

\*

Le Dictionnaire Pratique de Théologie, d'Exégèse, de Liturgie et d'Ecclésiologie : la grande œuvre de Turiaw ar Menteg. Les termes essentiels du vocabulaire théologique sont ici définis pour la première fois en breton. En excellent pédagogue, il a su les remettre dans leur contexte, faisant de cet ouvrage une véritable œuvre spirituelle vivante. Le dictionnaire, monolingue, de 343 pages et 1433 entrées, est suivi de deux lexiques breton-français et français-breton de 88 pages, puis d'index multilingues (grec, hébreu, slavon, latin...).

En outre, dans l'optique de la publication prochaine de cet ouvrage de référence, An Treizher propose différentes options d'acquisition des travaux de Turiaw ar Menteg précédemment publiés incluant cette souscription : voir pièce jointe. L'objectif étant de publier le Dictionnaire en 2016

Merci par avance pour votre soutien.

Yann Varc'h Thorel

<http://an.treizher.over-blog.com/>

- Nous confions à vos prières la santé du prêtre copte-orthodoxe Jacques DESCHAMPS, membre de notre fraternité Sainte-Anne.

<http://orthodoxesbretagne.blog.free.fr>

## **Extraits de l'intervention de l'archiprêtre Marc-Antoine Costa de Beauregard, à l'occasion de l'office de l' Huile sainte célébré le samedi 16 avril à Rennes (voir FSA n°18)**

### **La liturgie après la Liturgie**

#### **L'envoi**

L'appel à prolonger la célébration liturgique dans notre vie de tous les jours est inclus dans l'invitation prononcée par le prêtre à la fin de la divine liturgie : « Sortons en paix ! » - et tous répondent : « Au Nom du Seigneur ! » La prière qui suit « Kyrie eleison ! » dit notamment ceci : « Seigneur... donne la paix à ton monde, à tes Églises, aux prêtres, à ceux qui nous gouvernent et à tout ton peuple ». Ceux qui viennent de célébrer les saints mystères sont envoyés à l'extérieur de l'église (« sortons ») pour, dans la paix du Christ - et non n'importe quelle paix - intercéder pour le salut du monde.

#### **La vigilance**

Le plus important est de conserver la grâce reçue dans la célébration sacramentelle et de la faire fructifier. L'après-liturgie dépend de la façon dont les baptisés gèrent la grâce créée qui leur vient du saint Esprit au cours de la prière communautaire de l'Église. Comment faire ? En premier lieu, cultiver la vigilance. En effet, aussitôt franchie la porte de l'église - et même auparavant, quelquefois - le combat spirituel reprend : l'impatience, l'irritabilité, le jugement, la vanité, l'orgueil nous guettent, quoique nous soyons, par la communion au Corps et au Sang précieux du Christ, devenus la demeure du saint Esprit - être vigilant ; être sur ses gardes ; savoir qu'on va être tenté et éprouvé, avec la permission de Dieu.

#### **L'action de grâce**

Le second conseil qu'on peut trouver utile est de toujours lire, avec un cœur pur, les prières qui suivent la sainte communion. « ... fais que [tes mystères redoutables et vivifiants] servent également à la guérison de mon âme et de mon corps ; qu'ils éloignent de moi tout adversaire...que, gardé par eux dans ta sainteté, je me souvienne toujours de ta grâce... et vive désormais, non pour moi-même, mais pour toi, notre maître et bienfaiteur... » (prière 1). Mais cette prière commence par « Je te rends grâces... » C'est principalement par l'action de grâces que l'on conserve et fait fructifier la grâce.


#### **Une conscience sacerdotale**

Cet envoi et les prières d'action de grâce nous initient à un mode de vie renouvelé, enrichi par le souvenir de Dieu aussi continu que possible, par la prière pour nous-mêmes, pour nos proches, pour nos voisins, nos collègues de travail, ceux qui ont en charge notre pays et notre ville, et, finalement, pour le monde entier. L'intercession là où l'on se trouve pour le salut du monde est le signe par excellence du prolongement de la prière liturgique. Il nous appartient de conserver pendant toute la semaine cet esprit de louange et d'intercession.

## L'après-liturgie

Souvenons-nous que nous sommes dans le monde, non pas accidentellement, ou par hasard, ou par nécessité, mais par la volonté de Dieu. C'est Lui qui nous envoie dans le monde qui lui appartient comme ses prêtres et ses prêtresses porteurs de tous les dons du saint Esprit. L'après-liturgie reste une activité « liturgique », c'est-à-dire l'« œuvre du peuple de Dieu », dans la Cité. Et cette « œuvre du Peuple » est principalement une activité sacerdotale par laquelle nous glorifions Dieu et le supplions pour sa création tout entière.

(paru dans *Sagesse Orthodoxe*)



**Christ enseignant, atelier saint Michel et saint Bischoï ( 14360 BEAULIEU)**

## Paul Evdokimov Digoradur d'ar reizhvriadelezh

« Ar gristeniezh, arvez reterel-se hon sevenadur » a verk H.F. Amiel en e *Deizlevr kuzhutek*. Kornôgat ent rizhek e klask Amiel diskouez pegen reterel a ouenn ez eo an *holl*, ent speredel, e dalc'h an degasadenn hellazat ha yuzev. « An adeiladurezh bizantat, » a youc'has Theophile Gautier eus e du o weladenniñ Santez-Sofia e Konstantinopolis, « eo, dien, furm retvezek ar gatolikelezh » ...

Hogen, a dal d'ar reizhvriadelezh, e c'hell nep hini bet stummet gant unan a 'r vistri veur-se, Descartes, sant Tomaz Akwino, Calvin diwaskañ ur stroñs dirak un ampar ken nevez evit doare ha, koulskoude, boutin gwechall.<sup>1</sup> Enlouc'het don ennañ ijin ar *Gwir* roman, boas d'un devezout sklaer, kempoellek, furmel, d'ur reizhiad meizadoù savelet mat e vo goubet da enebiñ an kez bed frammet reizh ouzh "kevrinegezh amspis" ar reizhvriaded. Aesat temptadur. Hogen kement-se a ve dizanaout an diforc'h etre an hentoù diseurt da zenesaat ouzh ar C'hevrin, an arliv en hentenn endeeun da zec'havaelañ ar wirionez. En tu-hont d'ar geveneped Atena-Yerozalem, hellazidi-yuzevion emañ c'hoazh diorroadur ar speredegezhioù istorel ivez : Roma, Hippo Regius, Augsburg, Genève, hag, en tu all, Yerozalem, Antiokea, Aleksandria, Bizantion...

"El lec'h m'emañ ho kalon emañ ivez ho teñzor », eme an Aviel. Hogen gallout a ra bezañ ne vefe ket mui tre en arun ar c'hreizennoù kendeur m'emañ goubet ar c'halonoù dezho : evit darn ez eo gounezidigezh ar Mad dellezek eus ar weledigezh wennvidikaus eus Doue ; evit darn all ez eo tierniezh Doue o kantreizhañ e zilennidi dre ar feiz hepken ; pe neuze ez eo ar c'hrouadur nevez doueaet o strinkañ eus dengarded Doue ; pe c'hoazh ez eo difellusted ar Pab, hini ar Skriturioù, pe hini an Iliz, Korf ar C'hrist.

Ha denion ziforc'h ez omp dirak an un Doue ? Hag evel an Doue katolik, an Doue protestant pe an Doue reizhvriat e naouo diwezhatoc'h Doue ar gristeniezh abostolek, evel ma 'z eus gant mistri veur an arz ur C'hrist bizantat, flandrezat, spagnolat, rousiat ? Hogen, donoc'h eget an ijin broadel hag ar rizh sevenadurel ha donoc'h eget nep skeudenn lakaet e devn ene ur bobl emañ an egin, ar werc'helezh relijiel orin, andireadus. Lakaat a ra en argraf kudenn divent an hengoun abostolek hag ar fealded d'e spered, dezverk da nep hengoun.

Rak ne c'hell hini sipañ ribus er Skriturioù anez piaouekaet o diouvegadur bev a-hed an Istor m'he deus an Awen C'hlan komzet dispan dre an diouganerion ha dre ar sent. Dav e oa bezañ gwelevet hag ambilhet kammed goude kammed evit mont eus "Rouantelezh Doue" an Avieloù keñversell, eus " Buhez trafad " sant Yann, eus " kristoniezh" sant Paol da feizoniezh an Drinded gant an Tadoù. Dav e oa bezañ enkorfet gant an Awen ouzh kefleunder radwerc'haouek an Iliz, kevuniezh an neñv hag an douar, pergen. E se, pa save ar bed yuzev-pagan a-enep da Iliz an ebestel, ne gevenebas ket honnañ remistennoù tebouezek da zislavarout ar gnostegezh hogen, da gentañ penn, lakaat a eure da wir holl dirvoud kentizhek, ha darlammus c'hoazh, ar Gomz endenet. Derc'hel a eure an Tadoù abostolek hag an diskarezourion da vagañ eñvor bev an Arloz. Ha d'o heul Origenos, Irenaios, Atanasios ne oant ket mistri war "skridoù" met war ar feiz hec'h-unan ha treuzkas a raent, hep fennañ beradenn ebet anezhi, ar givad-se a Vuhez da oadvezh aour ar senedoù.

Eus ar c'hrefen diforc'h e c'hell an holl bremañ ober meneg. Eus ar savboent roman, ha tal ouzh ar reizhvriadelezh : ar *Filioque*, Maria krouet dinamm, difellusted ar Pab ; ha diouzh ar

---

<sup>1</sup>Gouzout a ouzer pezh kudennoù en doe Melanchton da dreiñ *Confessio Augustana* e gresim. Ne gave rummenn vonel ebet da ezgeriañ an deologiezh luterat dirak an trac'houn a ra eñ e-unan (en e lizher da uheldad Konstantinopolis, Joasaph II, e 1559) hini Atanasios, Bazil, Gregor hag Irenaios anezhañ. Gwelout ERNST BENZ, *Wittenberg und Byzanz*, Marburg 1949.

savboent reizhvriadel a-dal da gongredadur protestant ar bec'herion salvet dre ar feiz hag ar rad hepken : urzhaz frammet ar velegiezh, al lerc'hiaderezh abostolek, ar c'henwerediñ eostrivek, santelezh ar c'hrouadur nevez. Ne spir ket avat evit meizañ da vat ar reizhvriadelezh nad eo ket, naren, hanter-hent etre katoligelezh ha protestantelezh. Emañ hi evel un hollegezh speredel unvan na c'heller ket bruzuniñ ; Buhez dre hennad, ez eo dreist nep despizadur : "Deus ha gwel" eme gant gwir abeg an Tad Sergei Boulgakov da nep den a galon vat. Rak, ent-wir, a-douez furmoù ar gristeniezh ez eo ar reizhvriadelezh al leiañ erskrivadel, al leiañ jubennadus e meizadoù. Ha peogwir ez eo nes-tre da eien an alf palestiniat, eogeliek, an hini eo e hañval henaek da gentañ penn. Eus "hendadoù Doue", eus sant Simeon, santez Anna, sant Yozeb, sant Yann Vadezour, eus an ebestel, eus kristenion ar remziadoù kentañ e teu he speredelezh, he deved, he fedenn, hec'h ene. Neb a c'hell anez rakvarn ebet dont tre e bed ar reizhvriadelezh a zizolo ken aes ha tra kristeniezh-se an orin, hec'h egin, zoken, na pegement stuziet gant buhezadur remziadoù hir a dud, hogen maget biken-ataw diwar an un gwrizienn sanket en atil Palestina. "Diavaez ar c'hantved", diouzh ur gwel, ez eo he deoliezh e gwirionez ar goshañ gortozadeg a stumm, gant elfennoù ar bed-mañ, lizherennoù sakr ar ger "*maranatha*"<sup>2</sup>. Hevelep finvezelouriezh-glad en gwarezas diouzh gwask ar bed bedekaet hag a eure dezhañ tremen hebiou d'an arnevezouriezh, d'an araokadouriezh, da sklaeriadouriezh diroll ar skarennoù pe da zemerouriezh ar vonelourion<sup>3</sup>. Distro Kornôgiz bremañ da vammenn tadawouriezh ar reter hag he lidreizh a ziskouez splann ne oa an tamalloù e vije deuet da vezañ mirdiheñvel, balzamegenn, mann met treuzintent a berzh skiantourion ditouret nebeut pe gwallyoulek.

Gant un anaoudegezh ergorek e c'hell unan deverzout e nep munudenn eus ar vuhez reizhvriadel an un azeulerezh, dalc'hmat, d'ar fealded d'an Trac'houn kezivik : "Evel-henn e krede an Ebestel hag an Tadoù", honnezh eo an droienn santel a gadarna aktaoù ar senedoù hag a ziskouez pehini eo damant dispan Tadoù ar Senedoù. An "Abostol" eo anv lennadenn al lizheroù e skeud al liderezh pemdeziek, munudenn azonek pand eo an abostol, dres, an test a zo erouez evit gwir hag a gomz eno. Pe e kaver c'hoazh enni testeni na pegen karet ha kelennet ar Verzhherion hag ar Gofezourion a ziskouez an Iliz diazezet diwar gwad "mignoned gloazet-se ar Pried", diwar o fealded peurwell. Heñvel eo gant "Trec'h ar Reizhvriadelezh", a lider da sul kentañ ar C'horaiz Meur, a gouna striv kadarn ar Senedoù hag a ro da asklevout mouezh an Tadoù.

A drugarez da Zoue n'he deus buhez ar Reizhvriadelezh disrog ebet e diabarzh he c'horf. Nend eo ket bet strafuilhet gant brezelioù ar relijion, gant angerzhioù an tabutoù hag an abostolerezh gredek. N'he deus kemmet mann e fiziad abotolek ar feiz. Hiziv zoken, ha pand a he devezout doueoniel kalz war-raok, ez eo manet heñvel en he framm, en he speredelezh, en he fedennoù, en he feizoniezh, ouzh Iliz ar 7<sup>vet</sup> Sened hollvedek (787), ouzh an *Una Sancta* a-raok nep disrann, pa ne zamouezhe honhont ken tremened fresk-bev an ebestel<sup>4</sup>.

Komzet en deus an Arloz hag aet eo diwar ar bed-mañ. An Dihuzour en deus daveet ha ne zistro ha ne revez er bed betek e finvez ken dindan furm an Awen. Ha pa na c'haller diraez an Tad

---

<sup>2</sup>En XIX<sup>vet</sup> kantved er Gornôg e erzerc'has un devezourion bennak, Carlisle, Ibsen, Kiekegaard, L. Bloy, un nec'h trabedel. E Rousia avat e oa an holl lennegezh an hini a zizouete an eilpennadurioù da zont. D'ur pastor o weladenniñ Rousia hag o c'houlenn pezh kudenn zo e gor en Iliz Rousia e respont ur beleg : an Eildoned.

<sup>3</sup>Disrog an henfeizadourion nend eus mann da welout gant un disfeizenn. Deuet eo eus ur mantr skrijus, pa ne seven ket an Istor ar Rouantelezh santel. Utopiezh ar vilvedouriezh hag ar velegvelouriezh kaset d'ar par pellañ a c'hell kas tud da dec'hout diouzh an Istor betek dre emburaat en tan, emlath finvezelour. Ar skarennoù, dibaot, zo deuet a ziavaez bro da gontamm hag a genderc'h kendeuzadoù digunvez war zouaroù Rousia padal ne c'hallont e doare ebet bezañ lakaet da anadenn a 'r reizhvriad-elezh.

<sup>4</sup>Ha digefluskezh eo ? « Ar wezenn o c'hlasaat war ur garreg. » Skeudenn ar C'helenner Fedotoff a ziskouez ar reizhvriadelezh war un dro stag ouzh karreg an Trac'houn hag o talañ ouzh ar c'hudennoù kizidikañ a sav er Gornôg ivez. He c'hosmegezh hag he ferzhioù don finvezek, met he feizoniezh a 'n Awen C'hlan pergen, a ra dezhi marteze kavout he lec'h e penn a-raok ar prederiadennoù doueoniel en amzer hiziv.

ken dre ar Mab, heñveldra ne c'haller diraez ar Mab ken dre an Awen C'hlan. An « deasped »<sup>5</sup> zo war an treuzoù da nep kevuniezhañ gant ar C'hrist hag an Tad. Etre Komz Doue hag ateb an denion, etre Doue hag an denion emañ an Awen a *gristela*, a zegemer « en a-dreñv », er Mab, evit daskemenn « en a-raok » (Yn 16,15). An kez komz a Wirionez zo distaget dispan gant an Awen a Wirionez a ra Iliz anezhi. Bodadeg pec'herion, « Iliz ar re a varv », kevanaet penn da benn er C'hrist, *Krist eo an Iliz - totus Christus* - ha, dre se, ez eo doueel, santel, difellus.

Kemennadenn Yann, « an Trec'h eo bet faezhet ar bed drezañ » - rak « endenet eo ar Gomz » hag « he c'hlod hon eus kantarvestet » -, kantarvest an kez klod zoken zo anian ar Reizhvriadelezh. Unaniñ a ra ar Groaz ouzh ar Bez siellet a darzh dindan gwask ar Vuhez, heuliañ kerzhadeg ar gristeniezh veure a engrave war laourioù-maen holl veredoù ar bed an trec'h war ar marv hag hec'h embanne dre an holl hentoù. Sant Saraf a Sarov, o lavarout « Va levez, dasorc'het eo Krist » da gement hini en em gave gantañ, a gemenne tre spered ar reizhvriadelezh, he sourlevez, a zo toniezh ar Rouantelezh endeo.

« Digor din dor an azreg... Dero din daeroù ar pened, » a c'harm eostrivadegezh don ar Groaz ; ha ganti hec'h-unan dres, evezhiek ouzh tarzhadenn ziabarzhel he daelerezh a 'r silvidigezh, ouzh kefleunder barr-skuilh ar Groaz « roourez Buhez », e vezer daveet d'ar ganenn digaezhañ-mañ : *Abyssus abyssum invocat*, « Eus kondon (va c'hammwez) e tec'halvan kondon (da drugarez)... gant ar Groaz ez eo deuet levez an holl ! » Diraez a ra an uvelled, an azeulerezh uvel mes gredus, ar veziadegezh olañ-se, ar « stok ene »-se a veneg Origenos<sup>6</sup> a « deuta » ar Gomz a Vuhez : « Pezh hon eus klevet, pezh hon eus gwelet gant hon daoulagad, pezh hon eus kantarvestet, pezh o deus hon daouarnoù stoket outañ » (1 Yn 1,1).

An kez awen - « An Abostol » - nend eo ket piaou ar Reter hepken, hemañ o vezañ reizhvriat ken pa wared gant fealded ha pa zaskemenn ar genhêrezh : « Rak diskelet eo ar Vuhez : gwelet hon eus hi ha test ez omp anezhi » (1 Yn 1,2).

Paul Evdokimov  
in [L'orthodoxie](#), emb. Desclée De Brouwer, 1979, Introduction historique, Chapitre I,  
Introduction

Tr. Yann Varc'h Thorel  
NIDIAD, N° 23, gouere 2015

---

<sup>5</sup>Gourfedenn o c'houlenn digant an Tad degas an Awen, war ar Rodoù santel pergen d'ober ganto Korf ha gwad E Vab, ha war an elfennoù krouet ivez (dour, olev, h.a.) d'o c'hlodouezhiñ ha d'ober ganto danvez ar c'hevrennoù, " rak kement a stok an Awen outañ a vez santelaet ha kemmet " (s. Kirillos Yerusalem).

<sup>6</sup>Gw. Karl Rahner, *Le début d'une doctrine des cinq sens spirituels chez Origène*, Revue d'Ascétique et de Mystique, 1932, pp. 113-145.





costume des petites filles de Plougastel-Daoulas (confectionné par notre sœur Marie)

## Bulletin d'adhésion



Nom, prénom :

Adresse :

Courriel :

- J'adhère à l' Association Orthodoxe Sainte Anne pour l'année **2016**.
- et verse ma cotisation de 10 €        15 € par famille
- Je soutiens l'association orthodoxe Sainte Anne par un don de ..... et souhaite recevoir le feuillet Sainte Anne.
  - Je souhaite être membre de l'association mais je ne peux verser ma cotisation.

**Association Orthodoxe Sainte Anne, 95 rue de Béniguet, 29280 PLOUZANE**